

CHANSON AIR PILLAOUER

62

DISKAN :

*Selaouit ta mammou
Klemmou o priedou
Pere zo en pel bro
O chortos dont en dro* } *bis*

I

Cleved reont keleiou
Var calz ha lizerou
Penaos Merchet hon Breiz
Neuz diminuet ho feiz

II

Choant neuz derchel ar guen
Euz hon enebourrien
Ma neked en druez
Sonjit eta maouez

III

Ho pried pa deuiio en dro
Petra en a sonjo
Lared sot ar merchet
O carout Allemantet

IV

Deochu merched yaouand
E larin franchamant
Laquit ked a louzou
Demeuz o muzellou

V

Deoch choas merched yaouank
Laran va santimant
Chomit fidel bebred
Ia dho muia kared

VI

Rag beza prisonnié
Neked beza maro
Gant bolontez Doue
Dar guer e distroio

VII

Pa Distroio d'ar guer
Ag en yac'h ag dispos
E galon vo seder
Coulz en deiz evel en noz

VIII

Neuze viot eureujet
Ebars e ty Doue
Er mairie kontrattet
Heul usag ar chontre

IX

Gant eur guir union
E vevoch assambles
O taou en o canton
Betek fin ho puez

X

Vel ho tad ag ho mam
Choui raio o taou
Choui vevo sur divlam
Zavo bugaligou

XI

Deoch ta merchet yaoukant
E laran franchamant
Chomit fidel bepret
Ia d'ho muia karet

XII

Voilà mon compagnon
La fin de ma chanson
et puisqu'elle est finie
Chantons d'autres plus jolies

AR PILLAOUER.

Oppier (Bodilis)

*Imprimerie Gourdél
Landivisiau*